

Gwerziou gand Gueguen

*(Notenn gand Embann an Hirwaz : N'eus ket bet kavet
piou e oa Gueguen)*

Taolenn

Roit, roit atao.

Ar bugel hag e vamm.

Chom fur.

An arhêl hag ar bugel.

Roit, roit atao

En o ebatou goan, tud pinvidig, dreist mesur,
Pa veh kazi beuzet en kreiz ar blijadur,
Pa ne weler dirakoh nemed traou a luhed,
Kantolor ; mezelour, bank a-daol alaouret ;
Evid o diousskouarn ^pa vez ar muzik o son,
Pa vez an dañsou braz o ren en o salon ;
Soñjet e peuh a-wechou penaoz du gand an naon,
Eur paour-kêz malevruez, trist evel eun anaon,
A gleo a-ziavez o ebatou joauz,
Hag a wel dre ar gêr o skeudou lugernuz.
Soñjal a rit ‘eus aze war an neh hag ar skorn,
E-kichenn o falez azezet en eur horn
Eun tad paour heb labour a lavar goustadig :
« Nag a draou evelkent evdi eur pinvidig.
Gand ar c’hoariellou a ro d’e vugale
‘Vid ma bugaligou nag a vara ‘m-efe !
O weled an oll draou amañ o lugerni
E teu din da zoñj dezañ neuze ‘barz e di.
Eno morse tamm tan na vez ‘barz an oaled ;
E vugaligou paour a zo oll faminet¹ ;
E wreg a zo en pillou, ha war eun tamm kolo
E vamm-goz dinerzet ‘zo prest ‘vid ar maro. »
Ar soñj-ze ‘vid ar paour a zo poaniuz meurbed,
Hag evel eur gouli a hor² e spered.

¹ faminet : naon braz o-deus.

² a hor : a domm.

O ! c'hwi ar re³ 'zo mistri da vadou ar bed-ma',
Distanit e galon oe rei dezañ bara.
O ! ya, grit an aluzenn. Pa vez dirag ho tor
Eur paour kêz afamet⁴ e zorn gantañ digor,
Ma ne peuh ket a galon hag evel eur pemoh,
Ma na roit seurt dezañ, Doue a greñch warnoh.
Roit evid ma roin. Doue, mestr souveren
Ar hened d'ho merhed, hag an nerz d'ho mibien ;
Evid ma lakaio eost en ho parkeier
Hag anevaled lard e-barz ho krevier.
Roit, roit atao. Doeu a ray eun devez,
Ma ranko pep hini kuitaad e oll danvez,
An aluzennou 'rit a gavot en tu all.
Hag ar paour a lavaro : « Hennez 'oa ket den fall. »
Roit evid kaoud bennoz Doue 'zo 'n em hreet den,
'Vid ma teuy ar peoh mad en ho famill da ren ;
Roit evid ma kavot en ho kêr diweza,
Eur paour, sant braz en neñv, da zond d'ho telivra⁵.

³ ar re : pere,er skrid orin.

⁴ afamet : galleg : naon braz ennañ/

⁵ telivra : galleg : dieubi.

Ar bugel hag e vamm

« Da beleh eh a an dour a red
Dirag on daoulagad bepred ? »
Digand e vamm e houlenne
Eur bugel c'hoaz en e robe⁶.
« Daoust hag eñ 'welfom an dour-ze
O tond war e hiz adarre ? »

« Nann, va mabig, an dour a red
War e hiz biken ne deu ket.
Soñj, ma mabig, 'vel an dour-ze
E teremn deveziou ar vuhe'. »

⁶robe : galleg,broz.

Chom fur

Nann ! kerhenn dudiuz n'eo ket dantelezet
N'he-deus 'med eur mouchouar gand modesti skoulmet,
He zal 'zo pur, n'eus ket a fleur en-dro dezi,
Mez he daoulagad flamm 'weler o lugerni.
Petra 'dalv a zell flour rubanou alaouret,
En keñver eul lagad hag a lugern bepred ?

War he zaol 'ma an daou leor kaerra a zo er bed :
An Aviel santel, buhez ar zent venniget.
En korn ar chiminal ma'h eus ar zul bleuniou
An imaj ar Werhez 'zo a ziouch⁷ ar goueliou.

Ho taouarn, o ! va Doue, a ziwall an êl-ze ;
N'eu ket eur pleg en hent war hini e vale,
Netra en-dro dezi na vefe ket charmant,
Heb ober eur skeudenn 'barz an ho firmamant,
He fedenn velodiuz all bemdez ha bennoz
Kerzed 'vel eun alhweder, war-zu ar baradoz.

Dañjer ebed eviti nag a zehou nag a gleiz.
Sioul eo ! An aon atao 'vez taget gand ar bleiz,
En kreiz ar bokejou koanta e vez an êr.
Allaz ! Allaz ! ar preñv 'zo 'barz er frouezenn gaer.
Evid duad eun ene eru sell fall 'zo tra-walh,
Hag he spered kuriuz a goll kalon eur plah.

⁷ziouch : ?

Eun den brein a galon, a gorr, hag a spered,
O tremen re an ti-ze en-deus ankounahaet
War gorn eur pres eul leor karget a loustoni,
Greet gand eur skrivagner klañvoh evid eur hi.
O merhig, ma teufe biken da zornig pur
Da zigeri al leor-ze, ma lennfes e hudur,
Hebdale euz da galon eh efe kuit Doue ;
Gwelet ‘vefes o c’hoarzin demeuz ar burete.
Gand ar soñjesonnou da spered dirollet
Ne hallfe ken a renoz na kaved peoh ebed.
Debret gand an huñvreou, he hallfes ken morse
Na kousked ‘hed an noz, na kana ‘hed an de’.
Da galon, ‘vel eur bizin distag, vefe ruillet
Euz an eil fank d’egile gand taoliou mor ar bed.

O bugalegig dinamm c’hoaz e-barz ar vuhe’,
Ma vez biken tentet soñj an aotrou Doue ;
Soñj ar Werhez Vari, mamm an oll gwerhez ;
Soñj e-barz en oll zent hag en oll sentezed
A zo ‘barz ar porched hag iliz da barroz ;
Soñj e-barz an êlez a zo er baradoz.

Kleo ar moueziou dudiuz a ziskenn euz an ne’
Hag euz gweled an douar a h a war-zu Doue,
An heol o lugerni, al lapous o kana,
An noz steredennet, ar glao en eur goueza,
An deliou ‘barz en gwez, kement tra ‘zo en natur,
An oll draou unanet a lavar dit : « Chom pur. »

Chom pur ‘vel ar gwernili en e neizig bihan ;

Chom pur evel ar mel ‘zo greet gand ar gwenan ;
‘Vel ar bokejou kaer a lugern er prajou ;
‘Vel kement tra ‘zo flamm dindan bolz an neñvou.

Evel-se e chomi ken gwenn evel an erh,
Ano Doue a vo skrvet war da dal gwerh
Ha da hortoz an eur ma ‘ h i d’ar baradoz,
Bemdez e ri da bedenn hag e kouski bemnoz.

REFLEXION

Tud a goustiañs vad na ‘h it ket da gana
Forz pegen uhel e pig, an den fall er bed-ma’.
Pa ‘nefe war an douar oll vad hag oll voneur⁸
Red mad e deom mervel pa vez sonet an eur.
Gand ludu on tadou ez eo red meska or re
Hag oll ‘vefom barnet gand ar memez Doue.

⁸ voneur : galleg “bonheur“

An arhêl hag ar bugel

Eun Arhêl meurbed lugernuz
A-zoh eur havell a zelle
Eur bugelig koant dudiuz
Koachet e-barz en e wele.

Bugelig koant, ouzon heñvel,
Deus, emezañ, deus ganen-me,
Lez da gorvig 'barz ar havell
Ha nij en neñv gand da ene.

Petar refes war an douar,
Er bed-mañ ne gavi biken
Plijadureziou heb glahar
Na levenez heb he anken.

Ar spont 'zo e-kreiz an ebatou.
'Neus all den laret biskoaz :
An heol a lugern en neñvou,
'Vo ket amzer teñval warhoaz.

Penaoz ? an daelou a ruillfe
War da ziou jodig ker koant ;
Hag ar hwezen fall a ruzfe
Da dalig 'zo hirio ker drant.

Nann, nann ; er mêziou an neñvou
'H ez bremañ da nij ganen-me ;
Doue 'bardon an deveziou

E-poa da dremen er vuhe'.

Ra na zeuy den 'barz en da di
Da gemer melkoni ebed ;
Ra vo seder braz pep hini
Ken seder 'vel pa oe ganet.

Ra vo ar halonou laouen-tre
O welen ne vi ken ama' ;
Didach a-flamm 'vel ma'z out-te.
An deiz diweza eo ar brava.

Ha war e ziou askell neuze
An arh^le gantañ d'an neñvou
Eh eas 'vid kreski an êle'.
Mammig paour, da vab 'zo maro.